



Pa nemp garomp mad tre on daou



DISKAN :

*Pa nemp garomp mad tre on daou,
Ar vue baraiss ken kaër ;
Tout ar poaniou a zo ber
E karante neur bouchik brao
Vit be eïrus var ar bed ma,
Hellit beza gant neubeud dra.
Deviou trist ve ankounahet
Karit deus bers amourousted.*

1

Pegument dud var an douar
Zo klask secret an eïrusted !
Me meus he c'havet, kouls lavar
Hor c'halonou sambles lamet,
Bars neun neïzik e ma spered,
Tal ma c'hichen teud d'asea,
Ken tener va moes va savet,
Deus abardae gant beden ma.
Ho kan dudius
Ra hanomp eïrus ;
Vidomp tout vo melodius.

2

An heuriou trist ne gontent ket,
Nag ar zoursi deus peb deves ;
Enon-me ar joa da ganet
Pa gozet dign deus karantes
Lakef va foaniou da nijal.
Ha ma chagrin ra kement al.
Ho moes em c'honsol em duskel,
Vel rim eur vuen gant an avel.
Ha bars ar c'hoajou,
Tout al lapoussigou
Neun ket ken brao kanaouenou !

